

Mestroniañ ar skrammoù ha kreskiñ

3 - 6 - 9 - 12



A-raok 3 bloaz

Ezhomm o devez
ar vugale da zeskiñ
merkoù
en egor
hag en amzer

C'hoariit,
kaozeit,
lazhit
ar skinweler



Etre 3 ha 6 vloaz

Ezhomm o devez
ar vugale da zeskiñ
ar pezh a c'hallont ober
gant o femp skiant
hag o daouarn

Na rit ket re
gant ar skrammoù,
sellit outo asambles
komzit diwar o fenn
gant ar familh



Etre 6 ha 9 bloaz

Ezhomm o devez
ar vugale da zeskiñ
reolennoù
ar c'hoari sokial

Krouit traoù
gant ar skrammoù,
displegit dezho
petra eo Internet



Etre 6 ha 12 vloaz

Ezhomm o devez
ar vugale da welet
pegen luziet
eo ar bed

Deskit dezho
en em wareziñ
ha gwareziñ
ar pezh a skrivont



Goude 12 vloaz

Kregiñ a ra ar vugale
d'en em zizober
diouzh merkoù
ar familh

Chomit prest
da sikour anezho,
ezhomm o devez
ac'hanoc'h
c'hoazh !

« Savet em eus ar merkoù « 3-6-9-12 » evel un doare da respont da c'houlennoù stankañ tud ar vugale hag ar bedagogourien. » Serge Tisseron

3-6-9-12. Mestroniañ ar skrammoù ha kreskiñ, Emb. érés

Da bep oad, dibabomp ar programmoù asambles, na chomomp ket re bell dirak skrammoù, lakaomp ar vugale da gaozeal eus ar pezh o deus gwelet pe graet, broudomp anezho da grouiñ traoù.



3 - 6 - 9 - 12,

A-raok 3 bloaz

C'hoari gant ho pugel eo an doare gwellañ da sikour anezhañ da greskiñ.

Gwell eo ganin an istorioù lennet asambles eget ar skinweler hag an DVDoù.

Ar skinweler war enaou a ra gaou ouzh ho pugel pa zesk traoù, ha pa ne vefe ket o sellet outañ.

Skinweler ebet er gambr.

Difenn a ran implij ar binvioù niverel e-pad ar predoù hag a-raok kousket. Ne ran ket ganto gwech ebet evit sioulaat ma bugel.



Etre 3 ha 6 vloaz

Lakaat a ran reolennoù sklaer diwar-benn an amzer dirak skrammoù.

Doujañ a ran d'an oadoù merket evit ar programmoù.

An dablezenn, ar skinweler hag an urzhiataer : er saloñs hepken, ha neket er gambr.

Difenn a ran implij ar binvioù niverel e-pad ar predoù hag a-raok kousket. Ne ran ket ganto gwech ebet evit sioulaat ma bugel.

Gwell eo c'hoari gant re all eget e-unan-penn



Etre 6 ha 9 bloaz

Lakaat a ran reolennoù sklaer diwar-benn an amzer dirak skrammoù, ha komz a ran gant ma bugel eus ar pezh a wel hag a ra warno.

An dablezenn, ar skinweler hag an urzhiataer : er saloñs hepken, ha neket er gambr.

Reizhañ a ran al letrin c'hoari.

Komz a ran eus ar gwir d'ar brevezded, eus ar gwir da skeudenn an-unan, hag eus 3 reolenn Internet :

- 1) Kement tra a lakaer warnañ a c'hall dont da vezañ foran ;
- 2) Kement tra a lakaer warnañ a chomo eno da viken ;
- 3) Arabat krediñ kement tra a gaver warnañ.



Etre 9 ha 12 vloaz

Lakaat a ran gant ma bugel da be oad en do ur pellgomzer-godell dezhañ e-unan.

Gwir en deus da vont war Internet, din da welet pe e c'hall ober e-unan pe asambles gant un den all.

Lakaat a ran asambles gantañ pegeit amzer e c'hallou gouestlañ d'ar skrammoù.

Komz a ran gantañ eus ar pezh a wel hag a ra warno.

Degas a ran da soñj dezhañ 3 reolenn Internet.



Goude 12 vloaz

« Seurfiñ » a ra ma bugel e-unan war ar gwiad, met lakaat a ran asambles gantañ eurioù da zoujañ dezho.

Komz a reomp asambles eus ar pellgargañ, eus ar fripal, eus ar bornografiezh hag eus an harellerezh.

Da noz e troc'homp ar WIFI hag e lazhomp ar pellgomzerioù-godell.

Nac'h a ran bezañ « mignon » dezhañ war Facebook.



Skignomp ar skritell-mañ.

A-benn cheñch hon doareoù gant ar skrammoù e rankomp strivañ holl asambles.